

Michel Keineg (Quéinec). Pluguan 1849 – Kemper1909)
Modernnaet eo bet an daore-skriva.

Chañsou ar Bigoudennded

Me ‘z a d’ober eur ganaouenn,
Pa ‘m-eus paper, liou ha pluenn,
Da dud Pont ‘n Abad Plogastell,
Daou ganton braz a Vreiz-Izel
E-leh ma zo Bigoudennded
Gand o gwazed montobanet¹.

‘Touez ar Bigoudennded ivez,
E weler kalz kizou nevez
Ha marteze ‘ve mad diwall
Ouz ar re anezo ‘zo fall,
Pa ne weler ket o vervi
An dour morse gand koantiri.

O zud koz ma teufent en-dro
A ve sabatuet hirio :
O bugale ‘deus troket kiz
‘Michañs da blijoud d’ar bourhiz,
Ha troket feson da veva
Da gaoud digarez da eva.

Ar Bigoudennded da vragal,
Ar bleo ‘zastum war o zal
Dindan koefou – bleo alaouret.
Ar re ‘zo vil a vez kuzet.
Re prenet d’ar pardon, d’ar zul,
‘Tiskouezont gand taledenn dull².

War o fenn ‘giz eur glipennig
‘Zo eur hoz tamm bigoudenndeg³;
O dillad all gand gand ar bordou
A daol skeud war o diou chotou⁴.
Ha c’hoaz an dra-ze n’eo netra
Ouz an traou int kalz ar brava.

Gand o zeizenn pe beder lostenn
Int teo evel eur varrikenn,
Mez evid lod eo tromp-lagad.
Poan ‘deus kaoud eur gotillon vad.
Ar bordou all ‘zo war plegou,

¹ montobanet : Dond a ra al lesano "Montobanned" euz ano ar gêr Montauban, prefeti an Tarn-et-Garonne. Setu perag : fardet e veze dillad sul ar Vigouterien gand mezer a zeue euz Montauban. Displeget eo bet meur a wech gang Per-Jakez Helias. (Notenn gand G. Goyat).

² dull : tull, galleg ; doare mezer.

³ bigoudenndeg : koef doare ar Bigoudennded.

⁴ diou chotou : dioujod.

A-wechou war dammou truillou.

Lezom anezo da vragal,
Gand o dillad da vad da fall,
Evid komz euz ar pardonieu,
Ar marhjou hag ar foariou
E-leh ma vez Bigoudenned
Fichet da blijoud d'ar wazed.

N'eus ket pell, c'hwi a vousc'hoarze,
Joauz an eil ouz egile,
Oh eva odivi melen :
'Giz am vije lâz dre zienn.
Ha bremañ 'teuit d'en em damall,
E-leh a-raog 'ranker diwall.

Gwella 'peus bremañ da ober,
Eo klask ho proz, ho tavañjer,
Tenna euz ho tillad ar pri ;
Louzaouit mar gellit ho fri,
Ha goulenn pardon ouz Doue,
Nerz na evfeh birviken re.

C'hwi, gwazed, klaskit ho tokou.
Chomet war-lerh er poullou ;
Hoh izili toret aozet,
Ar friou kignet louzaouet.
Ha deskit c'hoaz en em ziwall,
Da eva re 'benn ar wech all.